

Zav d'ar Pañiel

*Tasset*

-----

Sav d'az Pañiel, ~~taset~~ va mignon  
 Laket hi aze; kichen hini Guyon  
 Laar d'ar vicherourien ha d'al labourerien douar  
 Panaoz en Breiz Izel ar Re ru'zo kar  
 Eur spont'vezo kement-ze d'an amprevañed  
 Hag eur iouc'h a galon d'an oll vretoned  
 War zao eta, tud daonet an douar  
 Ha bec'h da William Loth ha d'ar Marquiz Kerouartz  
 Ar c'henta'zo pechar hag an eil'zo gwen  
 O daou'evont memeuz-tra goad al labourien  
 War ar memeuz kar stlijet gant eun azen  
 Kargomp mignoned ar Radical ha Osven  
 Sav d'az Pañiel ~~Taset~~ va mignon  
 Hi zavet d'an aer kichen hini Guyon ?  
 Eul labourer douar hag eur micherour penek  
 A dle dont prim'a benn euz eun daou dreuhek  
 E bars an c'honec'h Kanton ar vech man m'eup an trec'h  
 Mar savet evel gwechal d'az Pañiel da n'ech  
 Paotred zant Nicolas'zo gourenerien mad  
 Callekiz'iouc'h dre oll ez eo ru o goad  
 Yacuankiz korle, Maël carhaix ha Gouarek  
 A gemro skuer oar'Rostreniz tud Kalonek  
 War zao ha dan emgan Raktal  
 War zao - ar Republik'zo en gwall  
 An avel a iud euz ar pevar c'horn ar bed  
 Bavar n'eo ket c'hoaz brein goad ar vretoned  
 Nan ; en despet da Loth ha dan Aotro Lostgwen  
 N'omp ket gañet evit beañ Sklavourien  
 An heol a splañ Lugernus duhont e lein an env  
 A lavar d'imp terri hon chadenno  
 Terri hon chadenno beañ unaned'vit beañ Krenv  
 Bevet ar re ru : Bevañ digabest pe ar maro

Loeiz ar Rouzic Me'sko  
Mécanician Gwengamp

29 Ebrel 1932.

*En barrez  
En Izel*

*En fiz.*

*En UR.*

*En groaz.*

*En Daniel*

*ped. hini e UR! Me ne m'euz nemed unan  
hini va zaban koz Breiz!!!*

*Loeiz ar Rouzic Me'sko  
Gwengamp an 9 a viz fevr 1930*